

# KANTIK

## Itron-Varia an Arvor

PATRONEZ AN DUD A VOR

---

WAR DON : *Nan eus ket e Breiz.*

DISKAN :

*Mari, Mamm Jezuz, Rouanez Arvor,  
Bet madelezus 'vit an dud a vor (bis).*

1

C'houi 'zo bet, Gwerc'hez, dre holl ha bepred,  
Mamm vat hon zud koz, Mamm ar Vretoned.

2

Ni, 'vel hon zud koz, d'eoc'h 'zo bet gouestlet,  
Eveltê, ivez, 'fell d'imp ho karet.

3

Evidomp, aman, 'n hon bro ger Arvor,  
Eun Iliz 'zo bet savet 'n hoc'h enor.

## 4

Gant prof ar pinvik, gwenneien ar paour,  
Gant poan ha pedenn 'voe graet al labour.

## 5

'Vit 'r re a brofas, bemde ni 'bedo,  
Ha bennoz Doue warnê a gouezo.

## 6

Pep sul ha pep gouel, ni holl Arvoriz,  
Gant Feiz ha doujans ni 'zeuy d'hon Iliz.

## 7

'Barz hon iliz goant, o Gwerc'hez Vari,  
C'houi hag ho Mab ker, ni garo pedi.

## 8

Micher ar moraer 'zo micher a boan ;  
Mari hon miro dinec'h ha dizoan.

## 9

Ar gwella listri n'int met eur bluskenn,  
Ha diouz ar maro a-vec'h hon difenn.

## 10

An avel diroll 'zo d'imp enebour ;  
Ho torn, o Mari, a sioula an dour.

## 11

Pa yudo 'n avel, pa vo gwall amzer,  
C'houi hon miro mât, c'houi 'vo hon sturier.

## 12

Avel yen Satan a sklas an Ene,  
C'houezit 'n hon c'halon tan ar Garante.

## 13

Pa vo du an oabl gant tenvalijenn,  
Steredenn ar mor, reit d'imp sklerijenn.

## 14

Mougenn ar pec'hed a guz hent an Nenv,  
Vit heuilh an hent fur, reit d'imp grasou  
[krenv,

## 15

Pa strako en aer trouz ar c'hurunou,  
Deuit prim d'hon diwall eus lein an Nenvou.

## 16

Grit na welo ket tud kaez an Arvor,  
Hon c'horf paour ruilhet gant lano ar mor.

## 17

War 'r mor dirollet, gant Feiz ni ouestlo  
Monet d'hoc'h Iliz pa vefomp distro.

## 18

Gant hon ziegez, ni 'zeuy eus ar gêr ;  
Dirak ho skeudenn, ni 'bedo seder.

## 19

Ar vugale gaez chomet emzivad,  
Ganeoc'h, o Gwerc'hez, 'vo diwallet mât.

20

Mor, pesked, avel, heol, loar ha stered,  
A veul an Doue en deus o c'hrouet.

21

Rederien ar mor, ni pesketerien,  
D'eoc'h, Steredenn-Vor, ni 'gas hon fedenn.

22

Ma fell d'imp treuzi mor ar bed hep doan,  
Sellomp ouz Mari 'vel ouz eun tour-tan.

23

Pa vo digor porz an Eternite,  
Lêviet hon bagig 'trezek tron Doue.

P.-M. L.

IMPRIMATUR :

Brioci, die 1a Octobris 1933.

EUG. BELLEC *Vikêl vras.*